

Komunion :

1 Ouelit, man daoulagad, ouelit, marv eo Jezuz :
Marv eo Jezuz 'veidomp pec'herion maleürus

**Diskan : Marv eo Jezuz 'veidomp àr ar manez Kalvar,
Peh kalon ne darzho get chif ha get glac'har ?
Get chif ha get glac'har !**

2 Tostait, pec'herion, dait ha gwelit ho labour :
Pep pec'hed hoc'h eus graet 'zo bet e dorfetour.

3 'N' em daolit doh e dreid, ouelit ho pec'hedoù :
Soñjet emañ bet kaoz d'e varv ha d'e boaniou.

4 'Veit tenniñ ho taroù, tenerat ho kalon,
N'hoc'h eus nameit sellet doh poaniou e Basion.

5 E gorf a zo drailhet, diflosket e vambrou,
E dreid hag e zahouarn treizet get an tachoù.

6 Get ar skop hag ar gwad, e fas 'zo dislivet,
Ha get lañs ur soudard e gostez digoret.

7 'Veit ho kalviñ neoazh, e benn a zo soublet,
E galon 'zo digor, e zivrec'h astennet.

8 Kristenion, emezañ, distroit enta dohin :
Mar h' eus kae d'ho pec'hed, prest on d'ho pardoniñ.

9 Pardon, man Doue, pardon : ne vennomp mui pec'hiñ
Kentoc'h mervel mil gwezh aveit hos ofañsiñ !

'Cit kloziñ an oferenn :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h : **R/ : Ha get ho spered !**

Ar beleg : Doue hollgelloudek d'ho pennigiñ :
An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel. **R/ : Amen !**

Ar beleg : Kerzhit e peoc'h hor Salver : **R/ : Bennozh da Zoue !**

Kan-dibenn :

D'ar Groaz Santel, Kristenion,

Kanomp gloar ha melasion !

Kanomp, kanomp, kanomp a galon !

1 Er groaz, un Doue en deus vennet, 3 Get ar groaz en deus Roue an Neañv

O madelezh hep par !

O madelezh hep par !

Mervel aveit salviñ ar bed,

Diskaret rouantelezh Satan :

Kanit, pobl ag an douar !

Kanit, pobl ag an douar !

2 Er groaz, dre e wad presius,

4 D'an holl e lâr : Karit un Doue ,

O madelezh hep par !

O madelezh hep par !

En deus hur prenet, tud kablus :

Marvet 'veidoc'h dre garantez :

Kanit, pobl ag an douar !

Kanit, pobl ag an douar !

Parrez KerAnna

2^e Sul ar Choareiz

5 a viz Meurzh 2023

« E gwirionez, an den-se a oa Mab Doue ! »

DisKan :

Gloar deoc'h-C'hwi, Jezuz-Krist !

(Ton : Meulomp holl)

Hozanna e lein an neñv ! (2 wezh)

Abiel gentañ : *Ha pa oant arriv tost da Jeruzalem, ha degouezhet e Betfaje, e-tal*

Manez an Olived, Jezuz a gasas daou ag e zisiplend en ul lâret dezhe : «Kerzhit d'ar gêrig a zo a-dal deoc'h; c'hwi a gavo doc'htu eno un azenez staget, hag hec'h azenig geti ; distagit-hi ha kasit-int din. Mar bez lâret un dra bennak deoc'h, respontit : an Aotrou en deus dober anezhe, ha kentizh goude eñ o lezo da zonet en-dro».

Kement-mañ a zegouezhas evit ma vehe bet daet da vout gwir komz ar profed :

« Lârit da verc'h Sion : Setu ho Roue é tonet davedoc'h, diloc'h ; azezet àr un azenez hag àr un azenig, mab an hani a zoug ar yev. »

An disiplend a yas enta, hag a reas 'vel m'en doa Jezuz gourc'hemennet dezhe. Int a zegasas an azenez hag an azenig. Ha goude bout int goloet get o mantilli, int a reas da Jezuz azeziñ àrnezhañ. Ar bobl a vostad a zisplegas o dilhad àr an hent; re arall a droc'he barroù a-zoc'h ar gwez hag o strewe àr an hent. Ha rac'h an dud-se, ar re a oa en e-raok 'vel ar re a oa en e-lerc'h, a save o bouezh da lâret : «Hosanna da Vab David ! Ra vo benniget an hani e za e anv an Aotrou ! Hosanna e lein an Ne !»

*Hag 'vel mah ae tre e Jeruzalem e krogas berv get ar gêr a-bezh ken na lâre an dud : «Piv eo hennezh ?» Hag ar re en ambrouge a responte : «Ar profed eo, Jezuz, a Nazareth e Galilea». Setu komz an Aotrou Doue : R/ : **Bennozh da Zoue !***

Kan al lidkerzh : **Gloar deoc'h-C'hwi, Jezuz-Krist !**

(Ton : Meulomp holl)

Hozanna e lein an neñv ! (2 wezh)

1 Digorit bras ho toriou

3 Digorit bras ho toriou

Porzhioù kozh, digorit !

Porzhioù kozh, digorit !

En em zigorit bras

En em zigorit bras

Ma tay hor Roue a c'hloar!

Ma tay hor Roue a c'hloar!

2 Ha piv eo Roue ar c'hloar ?

4 Ha piv eo Roue ar C'hloar ?

Eñ, an Aotrou kadarn,

Aotrou ar gelloudoù

An Aotrou gelloudek

Hennezh eo an Hani

Gelloudek en emgannoù.

Hennezh eo Roue ar c'hloar.

Lennadenn gentañ : *Lennadenn tennet a levr Izaia*

An aotrou Doue en deus roet din teod un disipl evit ma vin e stad da goñfortiñ ar re a zo aet skuizh. Pep mintin e ta d'am dihun, e tihun man divskouarn ma selaouin 'vel ma ra un disipl. An aotrou Doue en deus digoret din ma skouarn. Ha me n'em eus ket rekinet, n'em eus ket tennet àr-dreñv. Roet em eus ma c'hein d'ar re a skoe genin; ha

man divjod d'ar re a ziframme din ma barv; n'em eus ket distroet ma fas na doc'h an dismegañsoù na doc'h ar skopadennoù. An Aotrou Doue a za d'am skoazelliñ, ha rak-se ne santan ket an dismegañs; rak-se em eus lakaet ma fas ken kalet 'vel ar maen, ha gouiet a ran n'em bo ket kae.

Setu komz an Aotrou Doue : R/: **Bennozh da Zoue !**

Psalm 21 : Doue, man Doue, perak e hues man dilezet ?

Kement hini am gwel a ra goap ac'hanon

Skrignal a reont ha hejiñ a reont o fennoù :

«Lakaet en deus e fiziañs en Aotrou: dezhañ d'en dieubiñ, dezhañ d'er salviñ ma er c'har.

Ya, ur vandenn(ad) chas 'zo en-dro din,

Ur bagad tud drouk am gronn a bep tu.

Toulet o deus man daouarn ha ma zreid,

Emaint é kontiñ ma holl eskern.

Lodenniñ a reont man dilhad etreze

hag ma zoneg a dennont d'ar bilhoù.

C'hwi a-wael, Aotrou, na chomit ket pell a-zoc'hin,

C'hwi, ma sikour, hastit ma skoazellin.

Embann a rin neuze hoc'h anv d'am breuder

Ho meuliñ a rin e-kreiz an emvod.

C'hwi hag a zouj an Aotrou, kanmeulit 'nezhañ,

C'hwi holl diskennidi Jakob, rentit gloar dezhañ.

Cil lennadenn : Lennadenn tennet a lizher an Apostol Paol d'ar Filipiz

Hor Salver Jezus, Eñ hag a oa e natur Doue memb, ne sellas ket evel un dra ret evitañ derc'hel d'e renk, chom par da Zoue; met da netra eo en deus en em lakaet en ur gemer stumm ur servijour ha donet da vout par d'an dud. Eñ en deus en em izelaet c'hoazh en ur sentiñ betek ar marv, ha betek ar marv àr ur groaz. Rak-se, Doue en deus er savet dreist an holl, ha roet en deus dezhañ an anv a zo a-dreist da bep anv, evit ma plego get Jezus pep glin en Neañv, àr an douar hag e bed an Ankoù, ha ma tisklerio pep teod emañ Jezus-Krist hon Aotrou evit gloar an Tad.

Setu komz an Aotrou Doue : R/: **Bennozh da Zoue !**

Aviel :

Komz peurbadus ag an Tad : gloar deoc'h-C'hwi, Jezus-Krist !

Komz peurbadus ag an Tad : gloar deoc'h-Chwi, hor buhez !

Ar C'hrist a zo aveidomp-ni en em c'hraet sentus betek mervel, ha mervel àr ar groaz. Setu perak en deus Doue E savet d'an uhelañ, ha roet dezhañ un anv a zo dreist da bep anv.

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h : R/: **Ha get ho spered.**

Ar beleg : Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Mazhev.

R/ : **Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !**

En dibenn : ar beleg : Setu Komz an Aotrou :

R/ : **Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !**

Pedenn hollbedel : Etru Doue, en ho madelezh, selaouit hor pedennoù.

Lid ar profoù : ar beleg : Pedit, mam breudeur, ma plijo get Doue an Tad holl-gelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi :

R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.

Prefas :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

R/ : **Ha get ho spered !**

Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :

R/ : **Emañ troet trema Doue !**

Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :

R/ : **Just ha santel eo !**

Santel :

Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr ar bed !

Lan eo get ho kloar an ne hag an douar : **Hozanna e lein an ne !**

Benniget an hani a za e anv Doue : **Hozanna e lein an ne !**

Gorreoù : Degas 'reomp da soñj ag ho marv,
Aotrou Krist savet da vev,
Ha gortoz a reomp ho tistro.

Hon Tad : hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet,
Ho rouantelezh degaset deomp,
Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel en neañv.
Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek,
Pardonit deomp hor pec'hedoù,
'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp,
Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion
Met hon diwallit doc'h an droug.

Ar beleg : Plijet geneoc'h, Aotrou Doue,... ha distro hor Salver Jezus-Krist :

R/ : **Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.**

Lid ar peoc'h :

Ar beleg : Salver Jezus-Krist... a-holl-viskoazh da virviken.

Peoc'h hor Salver a vo bepred geneoc'h.

R/ : **Ha get ho spered !**

Oan Doue :

Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : ho pezit truez doc'homp ! (bis)

Roit deomp ar peoc'h !

Kent ar gomunion :

Ar beleg : Setu Oan Doue, setu an hini a lam pec'hed ar bed :

Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.

R/ : **Man Doue, ned on ket dign ma tait davedon,
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.**